

Skol ar Brezoneg

Niverenn 18


Ar-Falz 4-1963

KENTELIOU EVID BREZONEGERIEN

(Derez kenta)

Pennad studiet :
Eur horvad aon

Kenteliou savet gand A. MERSER
Skeudenn gand J.-P. LAFORGUE



Eur Horvad Aon

(Fañch Gourvest, lesanvet Fañch Gabel, a oa unan euz mevelien tad Yeun ar Gow, e Pleiben. Eun den dispont e oa, ha war a gonte, n'e-noa bet aon nemed eur wech en e vuez. Setu penaoz e oa c'hoarvezet gantañ.)

Eet e oa Fañch d'ober eur gwel d'eur heñderv dezañ a oa o tērhel tiegez en tu all da Vrasparz. E zillad sul a oa gantañ : tok nēvez boulouzēnned, chupenn zū giz Pleiben hag eun turbant glaz endro d'e zargreiz.

Araog en em gavoud e ti e genderv e ranke treuzi eur hoad digavandenn ha, p'en em gavas er hreiz anezañ, dindan ar gwez braz, e oa deuet an noz teñval pell a oa. Yen ha sioul e oa an amzer ha ne gleve trouz ebed nemed hini e dreid e-unan o kerzoud war ar gwiskad deliou seh a holoe ar wenedenn.

A-benn eur pennad e seblantas dezañ klevoud unan bennag o tond war e lerh. Eun harp a reas hag e tistroas da zelloud a-dreñv e gein, med ne welas den hag e kendalhas gand e hent.

A-veh e oa kroget a-nevez da vale, ma klevas adarre ar memez trouz ha ma chomas en arvar o klask gouzoud piou pe betra a oa o tond d'e heul. Setu-eñ neuze oh herpel eur wech all da roi eun taol lagad dreist e skoaz, med ne oa seurt war ar wenedenn.

Eun tammig neh a grogas ennañ hag e tistroas da gerzoud a gammejou braz. Kerkent eh adkrogas an trouz, evel ma vije bet eun den pe eul loen war e zeulioù. Ha Fañch da redeg, strafuillet a-greiz-oll, e-keit ha ma kreske tiz an hini a zeblante beza o tispenn e roudou.

Dre ma haloupe, e teue soñj dezañ euz ar haoziou en-devoa klevet e korn an oaled, pa oa bian, hag e kredas emede o vond da veza sammet gand an drougspered pe eur spes bennag deuet euz ar bed all. Ha, re bar d'eul loen pennfollet, e saillas

dirazañ, heb ober van ouz ar bodou keuneud a stoke ouz e fas. Gand ar beh a ree o redeg hag ar horvad aon a oa ennañ, e tivere bill-bill ar c'hwezenn diouz e dal. Evel eur hi difelhet e trohas leo e-pad pell, o kinnig mouga a-wechou gand e alan o vankoud dezañ..

Diflaka a ree pa erruas er porz, dirag ti e genderv. Eur bleukad a roas d'an nor hag e lammas en ti, dirag an dud sabaturet ouz e weloud ken spontet. Hogen neuze e oa darbet dezañ strobiella gand eur penn ouz e durbant o ruza war an douar etre e zivesker. Ha kerkent e komprenas e oa bet an turbant-se, o tond a-stlej d'e heul war zeliou seh ar hoad, kirieg d'e gorvad spont, ha diwar neuze n'en devoe kredenn ebed ken el lutined.

Yeun AR GOW.

(E skeud tour braz Sant-Jermen, 1955.)

GERIOU HA TROIOU-LAVAR

- tok **boulouzennet** : boulouz (pe : voulouz) tro dro dezañ.
 - **digavandenn** : ha ne vez den o tremen ennañ, dizarempred, digevanez.
 - **eun harp a reas** : chom a reas a-zao (a-zav) ; — **herpel**, K. : chom a-zao.
 - **chom en arvar** : chom nehet, o klask gouzoud petra c'hoarvez pe petra d'ober ; — **arvar** = amzivin, g. « doute » (**arvar ebed, heb mar** : douetañs ebed).
 - **e tifreas ; difrea, ober difre** : hasta afo.
 - **o tispenn e roudou** : o tond war e lerh.
 - **eur spes** : tasmant, skeud unan maro.
 - **difelhet** : heb felh, g. « rate », (ha dre-ze, hervez eur gredenn goz, gouest da redeg buan hag e-pad hir amzer).
 - **e trohas leo** : e redas buan-ha-buan.
 - **diflaka a ree** : kollet e oa e alan (anal) gantañ.
 - **eur bleukad** : eur boutad, eun taol kreñv roet gand an dorn serret (pe gand ar skoaz).
 - **strobiella** : stroboti, beza strobot (tost e oa da goueza, dalhet ma oa troad pe gar gand tra pe dra).
 - **kirieg** : penn-kaoz, penn-abeg.
- BREZONEG KERNE** — **Roi** = rei (L., T.) ; — **emede** = emedo, e vedo, edo (L.).

Diskleriadurion aozet evid
«PENNADOU-LENN» Ar Falz gand A. KRAVEL

1° AR GERIOU

— Eun turbant glaz en-dro d'e zargreiz :

Tresadennit eun den, ha merkit an anioiu-mañ :

ividig (korn an tal) — **kilpenn** (mell-gouzoug, mell-choug, poulkil) — **toull-fri** (fronell) — **elgez** (chik, groñch, balog) — **korn ar voh** — **bruched** (peultrin) — **kazel** (toull e gazel) — **dargreiz** (bandenn) — **ilin** — **glin**, pennglin — **orzorn** — **mell ar biz** — **ivin** — **morzed** — **kov-gar** — **souk** (chouk an troad) — **uvern**.

Mankoud a ra er roll-mañ gerioù all a vez implijetoh. Merkit anezo ive.

Klaskit **liester** (le pluriel) pep hini anezo, ha savit eur frazenn gand an **unander** (singulier) pe al liester.

— Eur gwiskad deliou seh a holoe ar wenodenn :

gwisk — gwiskAD.

An dibenn **AD** a verk ar **hementad** (la quantité)

Heñvel e vez gand :

boest — **boestad**
boutail — **boutailad**
metr — **metrad**
litr — **litrad**

Klaskit gerioù heñvel, ha savit frazennoù ganto, o verkañ anad an diforh ez eus etre an daou stumm.

Da skwer :

- **Yann, digas din eur voutaill houlo !**
- **Yann, digas din eur voutaillad laez !**

PENNAD DA ZEVEL

Aon ho-peus bet eur wech bennag, sur. Displegit deam an doare.

ENKLASK

Kredet e-noa Fañch edo eul lutun bennag ouz e heul. Bremañ ne gred den el lutuned, med ho tud pe ho tud-koz a ree. Goulennit diganto kontañ deoh istorioù lutuned.

2° YEZADUR

AR HEMMADURIOU WAR-LERH AR GER MELL (Les mutations consonantiques après l'article)

1. Adskrivañ an oll anioù a zo er pennad eur **ger-mell** (article) dirazo :

eur gwel, eur henderv, en tu all, ar gwex...

2. Sevel roll al lizerennoù derou-ger a zo bet kemmet, evel-henn :
kenderv — **eur henderv**
gwenodenn — **eur wenodenn**
hag all...

3. Lakaad ar ger-mell **ar** pe **eur** dirag ar gerioù-mañ, **gwaregel-unan** an oll re anezo (tous féminin singulier) :

- **kalon, kazeg**
- **tosenn, toenn**
- **pal, pluenn, plijadur**
- **garz, gaor**
- **gwerenn, gwenodenn**
- **bolenn, baleadenn**
- **mamm, moger.**

— Penaoz ho-peus kemmet **K T P ? G GW B M ?**
Savit eun daolenn euz ar **hemmadurioù-ze**.

— Klaskit gerioù **gwaregel-unan** ha lakait ar ger-mell dirazo.

4. Lakaad ar ger-mell **ar** pe **eur** dirag an anioù **gourel-unan** (les noms au masculin singulier)-mañ hag ive dirag an anioù **gwaregel-liez** -se (les noms au féminin pluriel) :

- **ki, tal, penn, gov, gwele, brezoneg, mén**
- **kalonou, toennou, pluennou, givri, gwerennou, bolennou, mammoù.**

— Peseurt ger a gemm ?

— Klaskit gerioù **gwaregel unan** ha liex ha gerioù **gourel unan** o kregi gand K ha lakait ar ger-mell dirazo.

3° DISPLEGADUR PERSONEL AR VERB

(Conjugaison synthétique du verbe) (1)

Ar memez dibennoù-verb hag ar re staget ouz "**ober**" an-eus (selled ouz ar gentel gentañ).

Neuze, e-kichen "**Derhel a ran**", or-bo "**dalhan**".

DOARE-DISPLEGA PERSONEL

Amzer-vremañ

dalhan
dalhez
dalh
dalhom
dalhit
dalthont
dalher

Amzer-dremenet-striz

dalhis
dalhjout
dalhas
dalhjom
daljhoh
dalhjont
dalhjad

Amzer-amdremenet

dalhen
dalhes
dalhe
dalhem
dalheh
dalthent
dalhed

Amzer-da-zond

dalhin
dalhi
dalho
dalhim, dalhfom
dalthot, dalhoh, dalhfet
dalthint, dalthfont
dalthod

(1) E brezoneg on-eus miret ar gerioù "displegadur personel ha diberson", a zo sklêr-tre. Med n'eo ket memez tra gand ar galleg "conjugaison personnelle", ne weler ket mad-tre petra eo, ha dreist-oll "conjugaison impersonnelle" a vo kemmesket e spered ar vugale gand ar "verbes impersonnels". Alese ar gerioù : "conjugaison synthétique" ha "conjugaison analytique", a ginnigom ober ganto en ar hentoù.

IMPLIJ AN DISPLEGADUR PERSONEL

(Emploi de la conjugaison synthétique)

1. — Sellom ouz ar frazennou-mañ :

a) **A-raog** en em gavoud e ti e genderv **E rankE** treuzi ar hoad **braz ha digavandenn**.

b) **A-benn** eur pennad **E seblantAS** dezañ klevoud unan bennag **o tond war e lersh**.

c) **Eun tammig** neh **A grogAS** ennañ.

d) **Kerkent** **EH adkrogAS** an trouz.

Bez on-eus, e penn ar frazenn, eur strollad gerioù a zo strollad **pouezusañ ar frazenn**, hag eur **renadenn** (complément) war eun dro.
(= En tête de phrase, vient un complément qui est le groupement fonctionnel sur lequel on veut insister.)

Klaskit skwerennou all er pennad, ha savit frazennou heñvel.

Da skwer :

Kalz a blijadur A gavAN o vale er hoajou.

War an daol E lakaAN bleunioù.

Bremañ EZ eOM da gouronki bemdez.

E-leh eur renadenn, e heller kavoud eun **doarener** (= ou l'eu d'un complément, on peut avoir un attribut) :

Plijuz E kavONT mond da gouronki asamblez.

2. — Sellom bremañ ouz an islavarennou-mañ :

(Examinons les propositions suivantes)

e) ... **P'en em gavAS** er hreiz **anezañ**

f) ... **MA klevAS** adarre ar memez trouz ha **MA chomAS** en arver

g) ... **e-keit ha MA kreskE** tiz an hini a zeblante beza o tispenn e **roudou**.

h) **Diflaka a ree PA erruAS** er porz.

Bez on-eus eun islavarenn o kregi gand eur **stagell-islavarenn**, (= Nous avons une proposition subordonnée conjonctive.)

Savit frazennou ma vo greet enno gand ar **stagelloù-islavarenn**-mañ :

ma, na, peogwir, pa, mar, a-raog ma, ken ma, nemed.

3. — Sellom ouz ar frazenn-mañ :

i) ...**NE welAS** den

Er stumm-naha e vez greet **bepred** gand an displegadur personel.

(A la forme négative, on emploie toujours la conjugaison synthétique, c'est-à-dire avec terminaisons, indiquant à la fois le temps et la personne.)

Savit frazennou er stumm-naha :

Da skwer :

Na spontit ket ouz al lutined.

4. — Sellom hoaz ouz ar frazennou-mañ :

Eun harp a reas HAG e tistroAS da zelloud a-dreñv e gein, med ne welas den **HAG** e kendalhas gand e hent.

HA, re bar d'cul loen pennfollet, e saillAS dirazañ heb ober van ouz ar bodou keuneud a stoke ouz e fas.

● Ar wech-mañ, on-eus **HA** (pe **HAG**). Frazennou all heñvel ez eus er pennad. Klaskit anezo.

● Eur **stagell kenurziañ** (une conjonction de coordination) ez eus euz **HA**, med e gwirionez ez eo **izurziet** an eil lavarenn ouz an hini gentañ.

Kenderhel a reas gand e hent, DRE ma n'e-noa gwelet den ebed.

Saillad a reas dirazañ DRE m'e-noa kredet e oa o vont da veza sammet gand an drougpered (selled ouz ar pennad).

Gand **pe** (= ou) e vez savet ar frazenn evel gand **ha**.

« **Pouez da huchal, PE e lakaIN** ahanout er-mêz ! »

N'eus ket tu, avad, d'ober gand an displegadur personel war-terh **rag, med** hag **hogen**.

(Cependant, on ne peut pas employer la conjugaison synthétique après les conjonctions de coordination **rag** (= car), **med** (= mais), **hogen** (= mais).

« **Ar hi a zo eet kuit RAG** ar vugale a stlape mein dezañ. »
... **Rag stlapad a ree ar vugale mein dezañ.**

« **N'eo ket spreded-tre ar bugel-mañ, MED** labourad a ra a-zevri. »
... **MED eñ a labour a-zevri.**

« **Ne blijte ket dezañ mond da vale, HOGEN** dond a reas. »
... **HOGEN eñ a zeuas.**

Savit frazennou gand HA ; PE ; RAG ; MED ; HOGEN.

Kentel yezadur
savet gand A. MERSER.



EUR GOANV KALED

(Diwar pennadou savet gand kenstriverien Konkour 1963)

Abred eo deut ar goañv ar bloaz-mañ, diwezad eo bet o vond kuit, ha kaled iskis eo bet tre ma 'z eo padet.

War-dro ar bloaz-nevez, e oam o kompeza douar dreg ar vilin du-mañ, d'ober eur hraou giz nevez 'vid ar yer. Eun avel seh ha yen a c'hweze diouz ar menez uhel dre kan ar Richer-Goz, hag eun heol gwenn a bare. Kaer on-doa labourad, ne deue ket en dommder en or memprou. Da veze deom mond beb eun amzer e-kichen ar poal ; treid an oustillou a veze lakeet ive da domma ouz an tan. An douar a oa skornet don, hag e veze da deom skei ar hreñva posubl gand beg lemma ar pioch d'ober tammou outi. War-dro unneg eur, an oabl a oa deut da holoï, ha kerkent goude an erh a oa kroget d'ober : ne oa hoaz nemed soubeh da genta.

A-benn eur hard-eur dindan an erh, ne oam ket gouest da labourad ken... Goude lein, an erh a deoae atao hag e veze gwelet brankou ar siprez dreg an ti o plega dindan e bouez...

.....

Al lenn a oa skornet kaled, eur pennad a oa. Beb mintin, ha zoken war an deiz, e rankem ferri ar skorn gand eur benveg bennag, da helvoud tapoud dour da domma, d'ober gwelien d'al loened... Zoken ar glanndour e foñs ar richerïou a deue da hlerenna a blasou.

Y. E. - Lise Montroulez.

Deuet ar yenienn en eun taol. Skorna ra ken a dor ar vein. Al laouer du-mañ zo bet faoutet ha va mamm he-deus bet maread a zipid !

An avel a zo kriz kenañ ; va skouarniou a ruzia beb mintin, ha ranket em-eus lakaad eun tamm boned heñvel ouz kalabousenn tad-koz.

Mond a ran d'ar skol dre hent ar prajou. Ne welan den ebed en eur vond : n'eus nemed ar vugale hag o dije kouraj evid doare. Ar re all a jom e-tal an tan da ziskorna boued d'an anevaled gand dour klouar.

A-wechou, ya, goude lein nemetken, e welan unan pe unan gand e falz, o troha keuneud dreg kein an ti...

Ar re goz a zo spontet : cheñchet tu d'an heol, emezo... yennaet hag eet an douar pell outañ ! Hag e chomont en o gwele, eur voutailad dour tomm ouz o zreid, diou pe deir gamizolenn hloan war o hein, ha sioul an traou ganto...

D. H., skol Lanhouarne.

Geriadur : Da (dao) = red ; — a deoae = a devae (V. tevaad, dond teo).